

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ | Radio Kreiz Breizh

STUMM

Stumm

Ar stumm, an doare, an ampartiz

« Stumm gwelloc'h zo gantañ »

« Neuint ket memes stumm »

« 'Bep seurt stummoù 'vez gwelet »

« Me zo stumpet d'ober se »,
me zo stummet, barrek d'ober se

« Stummet eo war ar vicher », ouzhpenn bezañ
bet stummet eo donezonet

« Hennezh 'neus un tamm mat a stumm »,
ur paotr a-feson eo

« Hemañ 'neus ar stumm da zañsal Fisel »,
gouzout a ra dañsal Fisel 'vel zo dleet

« N'eo ket stummet mat da labourat »

« Hemañ 'neus stumm 'bet da falc'hat »,
un den n'en deus falc'het gwech ebet a-raok

« Stummet he deus he c'hoef »,
roet he deus ur stumm d'he c'hoef

Stummañ

Stummer

Stummadur

« Beajiñ a stumm ar
yaouankiz »

« Stumm glav zo
war an amzer », tres
glav zo war an amzer

« Ar stumm-lavar »,
ar mod da gomz

« Ar stumm-skrivañ »,
an doare-skrivañ

Da vont pelloc'h

Kit da furchal war
lec'hienn Stumdi
da c'houzout
hiroc'h war
stummadurioù
da zeskiñ brezhoneg

COFINANÇÉ PAR
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne



Avec le Fonds européens
de développement régional



le gaden